

BREIZIZ NAONNET

D'AR WERC'HES A DA SÆNT BREIZ-IZEL

Kantic nevez, war tonn : *Jesus ! peguen bras ve.*

D'AR CRISTENIEN A VREIZ-IZEL E CHOM ER GUEAR A NAONNET

C. T.

1. Mari ! peguen mad eo
 Ho cavet e peb brô
 Bepret prest da souten
 Ar paour pa chô m christen } *bis.*
2. Eus a bep tu a Vreiz
 E zomp deut gant hor Feiz
 D'ar guear-veur a Naonnet
 N'hi ho ped He miret } *bis.*
3. Evit buez ar bed
 Miret ne deuemp ket
 Da gôll en eur Vrô bell
 Ar Vuez eternal } *bis.*
4. Pell demettis hor c'hærent
 Peb hini war he hent
 C'houi dreist oll a hentchô
 Betec deiz ar maro } *bis.*

5. Amann, pell deus hon brô
Pell deus hon zud maro,
Mari! hon diouallet
Er guêar-mann dirollet

} bis.

6. Itrônn eus a Wengamp
Chongit e zoc'h hor mam
Hastit, deut da sicour
Ho pugale baour

} bis.

7. Itrônn eus a Vulat
Troet sellou ho mab
Troet sellou Jesus
War ho pobl truezus

} bis.

8. Itrônn a Rumengol
A bell n'hi ho ped oll,
O guerc'hes douç a mad
Roet d'imp hor mennat

} bis.

9. D'ho kaloûn sacr, Mari
E c'hoûlomp e peb thy
E em westann hirie
Evel gwir vugale

} bis.

10. Itrônn santes Annan
C'houi goude da guentan
Goude ho merc'h, Mari
A pedfomp e peb thy

} bis.

11. Patroûnes Breiz-Izel
Warn-omp, oh ! gret eur sell
Bezit trugaresus
Widomp, tôte da Jesus } *bis.*
12. Sant Briecq, sant Guillerm
Sant Paol a sant Patern,
A chouï patroûn Kemper
Pedet widomp sant Clèr } *bis.*
13. Deoc'h bugale guec'hall
E fell d'imp e brô C'hall
Chôm leal a doujet
O tadou benniguet } *bis.*
14. Sænt eus hor parojou
Tadou hon ineou
Oll sænt a sæntezet
Pedet widomp bepret } *bis.*
15. Beleien a Guerne
Ac a Leon ive
A Dreguer a Wened
Jesus widomp pedet } *bis.*
16. Neuze n'hi guendalc'ho
Guiziou mad hon mam brô
N'hi a vezo kalet
E Feiz ar Vretonned } *bis.*

17. A goude pa deuiô

Ann deiz eus hor maro

N'hi a guitaï ewrus

Ar bed mann trubullius

} bis.

18. Er barados goude

N'hi a welo Doue

Tôt d'hor mam, tôt d'hor zad

N'hi a gavo t'hy mad

} bis.

19. Gloar d'an tad Eternel

D'he vab Celestiel

A d'ar speret ive

Tri fersoûn, Eun Doue

} bis.

